

Dre 'n traou ma oll patant e veler  
 Ar pouvoar bras eus ar bramou;  
 Renta 'reont ac'hanomp seder,  
 Ober a reont eureujou.  
 C'hoaz e vo lavarset marteze  
 Eo mezus rimal var ur bram,  
 Evidon da c'houzoud gouscoude,  
 Ne meus qet scrivet tra dign a vlam. (bis)

(12)

Leanezet, ha c'houi, merc'het coant,  
 M'ar deo o scouarn ofanset,  
 Me c'houlen diganec'h: p'o c'heus c'hoant,  
 Na gavit-u qet mad bramed?  
 Ar c'hoarzin vara o t'evuzigou,  
 Sertey a ra din conclui  
 E rid arizjou bramouigou,  
 Qercouls ha ma ra peb hini. (bis)

(12, suite).

D'ar Guin.

Var ton hon Joronde.

N'en eus netra ebarz er bed  
 Na rent dide he homach;  
 Memes scorn ar gouan calet,  
 A zo evit da uzach;  
 An douar 'ra, eus da veri,  
 E gloar ar prinsipala;  
 An eol a bar vit da veüri,  
 Me ver evit da eva.

fin.

A. Lédan.